

An Aotrou Tromenec'h

F. E.

CHAPEL AN ABSOLVEN

E TRI ARVEST



VB 3

BREST

RU AR CHASTELL. — 4

1911

10682


An Aotrou
Tromenec'h

63
891
682
ANN

P E

CHAPEL AN ABSOLVEN

E TRI ARVEST



BREST

4 — MOULLEREZ RU AR C'HASTELL — 4

1911

Diocese de
Quimper & Léon
Evêché de Quimper & Léon

Document numérisé en 2016

C'HOARIERIEN

An Aotrou Tromenec'h.

An Aotrou n'Eskop a Gastel.

Aotrou n'Abbad an Elez.

Robart an Diaoul, *eil kabiten e kastel Tromenec'h.*

Ronan, *an Tad koz.*

Herve, *an Tad.*

Paol, *ar Mab.*

Goulc'hen, *ar Breur bian.*

Tanguy,

Majan,

Eozen,

Guevroc,

Guenole

Gongart,

Sane,

Primel,

Urfold,

Efflam,

Armel,

Tugdual, *Baleer Bro.*

Soudarded, *for's peguement: tud euz ar Bobl.*

Soudarded a du gant Robart.

Soudarded a du gant Tromenec'h.

An histor zo bet c'hoarvezet e kastel Tromenec'h, e
Landeda, var dro ar bloaz 1602.

ARVEST KENTA

An Torfed hag an Eskumunuguen

E SAL VRAS MANAC'HTI AN ELEZ EN ABERWRAC'H



KENTA PENNAD

RONAN, an tad koz ; HERVE, an tad ; PAOL, ar mab ;
GOULC'HEN, ar breur bihan : *oll en eun doare
truezus, dillad paour...*

RONAN

Ni eo ar Bobl, an dud keiz a vresser dindan an treid, goassoc'h egued mein an hentchou ; var ar bek douar-man, etre an diou ster, euz ar Vroennou d'an Diouriz, a larkoc'h c'hoaz, ne c'hell mui den beva gant an Tromenec'h : c'huec'h leo tro var dro d'e vaner, neuz nemed spount en ty hag e kalon an oll ; an tad koz ne c'hell soken kaout eul leac'h didrouz da vervel e peoc'h etre divreac'h e Zoue.

HERVE

Ia, ni eo ar Bobl, an dud keiz a vresser dindan an treid ! Nag ankenius eo d'eun tad beva er c'horn douar man ! Kaer a zo poania gant an douar, ne zeu mui pen ed ebed da zarevi tro var dro da gastel an Tromenec'h ; bresset an ed e glaz gante gezek ; ne glever mui rod ar milinou o kana var bord an dour ; euz a vilin an Ifern da vilinou ar c'hastel hint tavet oll, hag a vagadou a varv an dud gant an naoun !

PAOL

Ia, ni eo an dud keiz a vresser goassoc'h egued ar vein var an hentchou ; mouguet peb levezet var an douar man ; an dud iaouank, pleget ho fen, ne zellont mui en dro dezho da velet a bleunia a ra ar spenn guen var ar c'hae, pe ar rozen el liorzou. Hag aoualc'h eo euz eun den e unan da lakaat tenvalijen ar maro var koanta bek douar a zo er bed ! O Tromenec'h, den milliguet !

GOULC'HEN

Ni eo ar Bobl, an dud keiz a vresser dindan an

treid goassoc'h egued ar vein var an hentchou !
Me eo bet laz et din va mam gant ar fallakr ; skoet
eo bet gant klenze an Tromenec'h p'edo hi o
luskellat va c'havel en eur gana d'in kantikou
Jesus hag ar Zent. Hag abaoue ne gavan mui den
ebed da gana d'in kantikou a zave gantho em
c'haloun dudi an Envou.

RONAN

O stad truezus !

HERVE

O bro maleurus.

PAOL

O tud keiz ma zoump !

GOULC'HEN

O va mam baour ! Setu me pell-zo eb mam ebed
var an douar !

RONAN

Piou a deüio, o va Doue, d'hon sikour !

HERVE

Pe seurt dourn krenv ha madelezus a savo
ac'hanomp a zindan treid an Tromenec'h ?

PAOL

Peur e paouezo d'hon bressa dindan e dreid
krissoc'h egued treid houarn ar c'hezek ?

GOULC'HEN

Va zad koz, va zad, va breur, setu o tont an
Aotrou n'Eskop, gant ar Venec'h.

RONAN

En em zastumomp aman a gostez ; marteze e
deüio deomp gant an Aotrou n'Eskop eur c'helou a
silvidiguez.

EIL PENNAD

*Ar memez tud, an Aotrou n'Eskop
hag ar Venec'h*

RONAN

Eskop santel, ne c'helfoc'h c'hui ket rei ar peoc'h
d'ar vro-man, ma c'helfe hon douarou maga guiniz
adarre, ha rei bara da vugale an dud.

PAOL

Lammit gant ho tourn gallouduz ar pouez a zo
var bep kaloun, da vouga dre ar vro peb levenez.

GOULC'HEN

Aotrou n'Eskop, difennit ac'hanomp euz an den
drouk a laz ho mammou da vugaligou ar vro-man.

AN AOTROU N'ESKOP, *oc'h azeza var e dron*

Va bugale, n'oun deuet aman nemed evit ho
tifen ; deuet oun euz va falez a Gastel evit klask
difennourien a enep an enebour a flastr ho touarou
hag ho kalonou dindan e dreid.

Aotrou n'Abbad, a deut eo duchentiled ar vro e
moa pedet d'en em gaout aman hirio, e manac'hti
an Elez evit stourm euz Bourreo ar Vro, an aotrou
Tromenec'h !

AN ABBAD

Duchentiled ar vro, Aotrou n'Eskop, ho deuz
aoualc'h da ober o reded ar c'had hag ar c'haro ;
n'eo ket e torfedou Tromenec'h nag e enkreiz tud ar
vro-man ema sonj ar reze.

AN AOTROU N'ESKOP

Penaoz, en eur vro ken stank ennhi an duchen-
tiled, ne vezo gulet den ebed o sevel evit gourin
euz an Tromenec'h ! Pe seurt eta eo deuet da veza
nerz ar varc'heien koz, pa ne velan aman hini euz ho
bugale ; na re Kerouartz, na re Drefily, na re Kera-

danet, nag hini ebed euz an tregont kastel all a zav ho zouriou huel etre aochou an Aberwrach hag an Aber-Benniguet ! Distanet siouaz ar garantez kristen dre ar bed pa jom ken dizeblant an dud gallouduz dirag trubuillou an dud dister !

AN ABBAD

Aotrou n'Eskop, stourm euz an Tromenec'h n'eo ket brao ; hennez n'eo ket eun den ec'hiz ar re all ; hennez a zo stag euz e glenze galloud an Ifern ; nag a duchentiled ho doa lakeat en ho spered dont d'en skei beteg en e gastel ; araog m'ho divije bet amzer d'en em lakaat en hent, e vijent diarbennet ganthan ; a puluc'het dezho ho c'hastel gant an den fallakr, a du ganthan an oll drouk sperejou.

AN AOTROU N'ESKOP

Petra, hag ar varc'heien kristen, hag hint n'eo ket bet staguet eus ho c'hlenzeier galloud an Nenv, galloud Doue dre vertuz pedennou an Ilis ? O mez, mez d'hor bro, neuz ket ennhi eun den a galoun, eun den a feiz krenv da zifen e guenvroidi euz mab an ifern a c'hourdrouz koll aman en eun dro ar c'horfou hag an Eneou !

RONAN

Aotrounet, selaouit : me a glev o tont gant an hent eur marc'h d'an daou lam.

HERVE, *strafuillet*

An Tromenec'h a zo erru varnhomp.

PAOL

Tec'homp, tec'homp dirak e glenze a zo klenze ar maro.

RONAN

Aotrou, me ne ran fors beva pe mervel ; mez en hann' Doue, kuzit euz taol ar maro ar c'hrouadur rik man ne c'houlén nemed beva.

Ar BÜGUEL, *n'eur greña a en em daol euz an Aotrou n'Eskop.*

Aotrou n'Eskop, kuzit ac'hanon, diouallit ac'hanon euz klenze an den digriz hen deuz lazet va mam.

AN ABBAD

Setu hen er porz gant e varc'h !... Var e varc'h a var e gorf e velann ar stern vrezel o skedi !... Mes neo ket an Tromenec'h eo !

AN AOTROU N'ESKOP

Piou eo eta ?

AN ABBAD

Meulet ra vezo Doue ! an Aotrou iaouank a Garman euz a Guernilis, eüna kaloun den a zo er vro, lemma klenze, starta breac'h ; hag hen c'hoaz iaouank flam, a kaer evel an deiz.

AN AOTROU N'ESKOP

Grit dezhan dont aman dirazoun (*an abbad kuit*).

An tad koz (*a vouez izel hag estlammuz*). Troad ar marc'h a grene ganthan an douar e c'hiz gant troad marc'h an ankou ; hag an dir a drouze estlammuz en dro dezhan e c'hiz trouz al lezou ! Doue ra ziouallo buez an Aotrou Karman.

TREDE PENNAD

Ar memez tud, hag ouspen an Aotrou Karman, hag an Abbad

AN AOTROU KARMAN

Aotrou n'Eskop, iskuzit ac'hanon, ma n'oun ket deuet d'an heur e poa merket ; a dreuz var va hent, em meuz kavet hiniennou euz paotred Tromenec'h, hag eo bet red d'in c'hoari ar c'hlenze evit dont beteg aman d'ho kaout.

AN AOTROU N'ESKOP

Va mabik keaz, goad a zo var da stern houarn :
tizet out bed gant klenzeier ar vüntrerien.

KARMAN

Me ne meuz bet nemed eur gouli dister em
breac'h ; goassa-zo, siouaz, daou euz va c'hompag-
nunez a zo chomet var an dachen, skoet eb gou-
zout dare dezho gant an dud trubard ; gant ar
gounnar a meuz saillet e kreiz ar vanden euz ar
reman ; pemp amprevan louz a zo breman var o
ginou o tibri poultren an hent ; mez va hunan oun
bet tizet eun draik bennag em breac'h diou.

AN AOTROU N'ESKOP

Va mab, ten a zivar da ziskoaz eur stern ker
pounner ; ar Venec'h, gant ho louzeier flour, a bareo
buhan da c'houli.

KARMAN

Disterna, Aotrou ? Ne rin ket : o tremen dirak
kastel Tromenec'h, ez oun eat var eün dirag an nor
dal da c'houlén komz euz ar mestr ; pa zeo en em
gavet var dreuz e zor, e meuz lavaret dezhan en
em zerc'hel prest da zont ganen var an dachen
kerkent ma vijen distro euz ho kaout... Ne fell ket
din e c'hedfe ganen an Tromenec'h ; mez araog
kregi ganthan, eo falvezet ganen kaout ho pennoz
var va c'hlenze, a varnhon va unan evit ma vezimp
hon daou kreffoc'h da ren ar stourm evit Doue a tud
keiz ar vro man bresset gant an Tromenec'h !

AN AOTROU N'ESKOP

Mez va mab, na zi ket da hunan dirag an den-ze ;
mont a raffe d'id dre drubarderez, ma ne vez den
enho evit da zifen !

KARMAN

An Tromenec'h a zo den chentil, a na meuz
ket klevet lavaret hen deffe, daoust d'e dorfedou

all, manket d'ar ger en deffe roet ; a goude tout,
me ne hellan ket mankout d'am hini ; pa meuz
lavaret mont, e zin, hag eb dale pelloc'h ! Ho
pennoz eta, Aotrou n'Eskop, d'in ha d'am c'hlenze,
ma lammin var va marc'h da ziskar an Tromenec'h,
ma vezo hivisiken peoc'h d'an dud er vro man.

AN AOTROU N'ESKOP

Pa peuz roet da c'her, kea 'ta, Breizad kalounek !
Ra vezo nerz Doue ganez hag gant da glenze !
Kea, ha bez treac'h, en hano an Tad, ar Mab, hag
ar Spered-Santel !

KARMAN a zav goude daoulina

A breman, var varc'h ; araok pell, fizians a meuz,
me vezo distro da rei deoc'h, Aotrou n'Eskop, a
deoc'h c'hui tud keiz, ar c'helou mad e vezo achu e
vuez hag e dorfedou gant muntrer ar vro-man !
(Mont e ra kuit).

PEVARE PENNAD

Ar memez tud, nemed Karman

AN AOTROU N'ESKOP

Goal skuiz hen doa an ear da veza evit mont
deoc'h-tu var an dachen ; keuz a meuz da veza e
lezet da vont, iaouank ha tener c'hoaz, da glask
stourm euz eul lazer ken gouiziek var e vicher hag
an Tromenec'h.

AN ABBAD

Bezit dispount, Aotrou n'Eskop ; neuz ket bet
pell-zo eur c'hlenze par da hini an Aotrou Karman ;
mar bez leal ar stourm, Tromenec'h zo deomp.

AN AOTROU N'ESKOP

Mez ar gouli euz e vreaoc'h a zinerzo Karman ! O
va Doue ! enkreiz a zo em c'halon !

RONAN *gant ar memez mouez*

Troad e varc'h o tont, troad e varc'h o vont a skoe d'an douar ec'hiz troad marc'h an ankou ! Va Doue, diouallit buez an Aotrou Karman !

AN AOTROU N'ESKOP

Deomp breman, Menec'h santel, deomp d'ar chapel da bedi Doue da veza a du gant an Aotrou Karman. (*Mont a reont o lavaret goustad ar Miserere*).

PEMPED PENNAD

*Ar memez tud, nemed an Aotrou n'Eskop
hag ar Venec'h.*

RONAN

Aben breman, gant e varc'h a nij evel an avel, eman Karman var an dachen, var dachen ar foennok duhont dirak ar maner, o c'hervel Tromenec'h gant e vouez dispount, hag hen dindan e stern keduz henvel euz an Eal digasset euz an Env evit difen an dud keiz ; seblantout a ra d'in gullet an Tromenec'h o tont euz e gastel terval, var e varc'h d'an daou lamm, ar stern hag ar c'hlenze o steki spountuz hag o trouzal a bell ; e varc'h eo e voue ruz tan evel ar flamm ; hag hen gant e stern dir henvel euz an eal fall a tispak euz porz an ifern ; ô va Doue, truez euz an Aotrou Karman !

HERVE

A ben breman eo strinket ar c'hlezeier euz ho c'hostez, hag e stokont an eil euz eben en eur losker flemmou tan euz ho dir e c'hiz luc'hadenou ; emaint o vont hag o tont, o trei hag o tistrei an eil en dro d'eguile o klask hent d'ho c'hlenze da vont beteg ar galon !... goad a zo breman o ruzia gueod glaz ar foennoc hag ar bleun e bord an dour red ! Truez, va Doue, evit an Aotrou Karman.

PAOL *a vouez izel*

A ben breman marteze, unan euz an daou gouriner a zo stlapet, gant eun taol pounner, euz a gein e varc'h var an dachen da goueza ! Eguile d'e dro a zilam d'an douar ; e c'hlin gant han var stommok e adversour, beg e glenze var e c'houzouk pe var e galoun, e sank an dir er beo ken a zinkl ar goad ! O va Doue, dinerzit brec'h an Tromenec'h mar deo savet da skei hon difennour !

AR BREUR BIHAN

Aben breman marteze, liou ar maro var e dal, huanad ar maro var e vuzellou, unan anezho a zo astennet var an dachen, beuzet eo en e c'hoad ec'hiz ma z'eo bet beuzet korf va mamm baour ! O va Doue, na bermettit ket e ve hennez, ar c'horf maro ze, hini Karman, an den mad hen deuz bet truez euz an dud keiz er boan.

C'HUEC'HVED PENNAD

Ar memes tud, an Aotrou n'Eskop o tistrei

AN AOTROU N'ESKOP

Ken enkrezet eo va spered ma ne c'hellan chom ehars an aoter da bedi.

Tud keiz, neuz deuet c'hoaz kelou ebed euz ar stourm ? O, aoun a meuz a vez ar c'helou-ze kelou maro an Aotrou yaouank a Garman ! Nag a remors em beffe-me, da veza lakeat an oan-ze etre skilf ar bleiz !

RONAN

Aotrou n'Eskop, kelou ebed evit c'hoaz.

AN ESKOP

Pe seurt fin, gav deoc'h a vo d'ar stourm-man ?

HERVE

Siouaz ! pe seurt a c'hellomp-ni lavaret ? Ne c'houezan evidoun-me nemed eun dra : an Tromenec'h n'hen deuz ket c'hoaz kavet e bar da c'hoari klenze ; nac a veach a meuz-me e velet o tiskar adversourien euz a bep seurt ; spountuz eo pa vez savet huel var e varc'h o trei e glenze en dro de ben evel eur c'helc'h tan, araog e doler var ben pe e kaloun e adversour.

AN AOTROU N'ESKOP

O pennaos eo deuet eun den ken kalounek da drei var an hent fall ?

RONAN

Ez yaouank e meuz e anavezet : ne oa ket d'an ampoent fall ar c'hrouadur : eur mignoun dizuch a zo bet e eal fall ; ganthan en em roaz d'an dizurs a d'an dispignou ; a pa oa teuzet e beadra, o veza ne zeuz mui dre ar vro na reiz na lezen, ec'h en em lakchont ho daou da ober ar vicher a reont breman ; dastumet gantho e kastel Tromenec'h an oll laëroun a munterien tro var dro a soken tud iaouank ar vro touellet gantho ; ober e reont gantho skrab var ar maneriou kouls a var ti ar c'houer, da ober cher vad etrezho en ho zoul laëroun.

AN AOTROU N'ESKOP

A piou eo an eal fall-ze ?

RONAN

Den ne c'hoar euz a be vro eo deuet an amprevan-ze ; ni ne reomp anezhan nemed Robart an Diaoul, abalamour d'he vicher fallakr ha d'an dillad ruz a zoug ato. N'eo ket an Tromenec'h ; hennez eo a zo kirriek deomp da veza ken maleurus ; panefe hennez, pell-zo Tromenec'h a vije distro euz an hent fall ; meur a vech e leverer hen deuz klasket terri e liammou ; mez hennez a zigouez ato

var an heur, e c'hiz ma vez an diaoul e unan, da voug a ar remorziou a zav e kalon an Tromenec'h.

AN ESKOP

A keit all-zo e kendalc'h d'ho pourrevi, ne peuz ket kavet tro d'he ziskar !

HERVE

Pa n'ho deuz ket gellet an duchentiled dont a ben anhezan, penaos a c'hellimp ni hen ober ?

AN ESKOP

Mad, c'hui eo a ranko e drec'hi : elec'h krial hag hirvoudi euz Doue, perak no heuz c'hui ket roet dourn an eil d'eguille, great etrezoc'h eur chaden da ziarben an dud fallakr ? Doue ne ro skoaz nemed d'an dud a galoun, a ra da genta euz ho galloud ? Perak tud ken soun ha c'hui, ken iac'h ho izili ma zoc'h c'hui n'ho peffe ket desket c'hoari ar c'hlenze ivez, evit difen ho tanvez, ho puez, buez ho pugale ! Hervez an amzeriou, kouer a rank deski ouspen kas an arat ; den a vrezel a rank beza hirio ; ken na c'houezo kouer en em ober dioc'h an amzer, ne vezo evithan hag evit ar vro peoc'h assur ebed ; hen e unan eo a rank diazeza ar peoc'h-se var e c'halloud, var e c'houiziegez e hunan !

PAOL

Guir e lavarit, Aotrou n'Eskop : ruzia a ran gant ar vez o sonjal em mezfe lezet kement a dorfedou da gontrista ar vro eb beza great implij euz va nerz d'ho mired ; pennaos ne vez ket deuet kentoc'h sklerijen var va spered da ziskuez d'in va dever !...

GOULC'HEN

Tad koz, tad, ne glevit ket ?

HERVE

Eo ; trouz eur marc'h d'an daou lam, ar stern
vrezel o trouzal dre ma sko e droad d'an douar !

AN AOTROU N'ESKOP

Oh ! Piou eo ! a trec'h eo bet Karman ?

RONAN

E ma o skei var an nor vras ; eur vouez a
glevan.

AN AOTROU N'ESKOP

Mouez piou eo ? Lavar din, den koz, anaout a rit
ar vouez-ze ?

HERVE

E ma ann or o tiguéri ; bremaik e veloc'h piou a
lammo dreist an treujou ?

GOULC'HEN

Digor an or !... an Tromenec'h eo, an Tromenec'h
eo !... hag hen en ti gant kounar, e gleuze en e
zourn !

RONAN

Da belec'h e tec'himp ni ? Piou a ziuuallo va
bugale ? Deuz va mabik ; d'eomp d'an Iliz da bedi
Doue hag ar Verc'hez da gaout truez ouzomp.
(*Klask a ra tec'hel gant e vabik bihan ; Tromenec'h
a en em gav dirazho ; kizout a reont, spountet*).

SEIZVED PENNAD

*Ar memez tud, Tromenec'h ouspen !.. Prest goude
ar Venec'h*

TROMENEC'H

Pelec'h e ma an Eskop dre aman ?.. Lavarit d'in,
amprevaned a flastrin bremaik dindan seul va botez

(*o velet an Eskop*). Ah ! setu aman an Den Doue
a gave dezhan lakat da goueza varnomp-me kudu-
rennou an Nenv !

AN ESKOP

Piou out'he, da zillad houarn ken du a plu ar
vran ? Goad piou a zo var da zillad ? Kleuze piou a
zo en da zourn torret a dammou.

TROMENEC'H, *o teuler ar c'hlenze da dreid an Eskop*

N'en anavez ket ? Henez eo ar c'hlenze e poa
benniguet bremaik evit trouc'ha d'in me va gou-
zouk ! Da vennoz, Eskop, ne dalv ket hirroc'h egued
dir Karman ! ho daou, e zir a da vennoz a zo bet
trec'het ganen ; du-hont var ar gueod glaz e ma o
veuzi en e c'hoad da vignoun Karman.

AN ESKOP

Petra ! Lazet e peuz ivez Karman ?

TROMENEC'H, *o tenna e glenze*

Treuz didreuz eo eat va c'hleuze dre e gorf ; sell !
Ruz eo c'hoaz gant goad da vignoun a zo skuillet
bremen var an dachen a glaske varnhi leda ac'ha-
nomp-me !

AN ESKOP

Tromenec'h, heman eo da dorfed diveza. Ne heller
mui da c'houzant etouez ar gristenien ; a da c'hor-
toz ma teuo Doue da zispartia ac'hanot euz a douez
ar re veo, me za dioc'h-tu d'az dispartia euz a
douez ar gristenien.

Aotrou n'Abbad, kerc'hit d'in raktal leor al
Lidou Santel enhan pedennou an Eskummunuguen !
Kerc'hit ive ar goulaou bras evit lidou spountuz
an eskummunuguen !

TROMENEC'H

An eskummunuguen ! Ma n'eo ket noazussoc'h
d'in egued ar bennoz o peuz roet da gleuze Karman,

taol hardiz varnhon, taol hardiz da eskummunuguen (*hag e a choum, kroachet e zivreac'h var e stomach, o sellet euz ar Venec'h o prepar al lidou*).

AN ESKOP, (*var e drôn, — eur Manac'h o terc'hel digor dirazhan al leor, a goulaoz var elum gant ar Venec'h all*).

O Doue, Krouer ha Mestr peb tra ; setu dirazoc'h var elum c'hoaz ar goulaoz man ; bet ez int ar skouer euz buez, euz donezonou lakeat ganeoc'h da skedi e Ene an den fallakr a zo aman... O Doue, c'houi a c'hoar an implij fall hen deuz great euz e vuez hag euz ho tenezonou, euz an nerz o peuz lakeat en e c'hoad, euz ar galloud lakeat en e vreac'h. En em lakeat eo dre ar vuntrevez, dre an disursou ar mesussa e renk ar goassa torfetourien.

TROMENEC'H

Dioual evelato, Eskop, ne skuiften o selaou da zismegansou ! — Dioual ! me a c'hellfe c'hoaz en em zifen ?

AN ESKOP

Neuz difen ebed a enep Justis Doue ; n'eo ket euz tud eo e peuz affer hirio : euz Doue eo ! E valloz, maleuruz, a zo o vont da goueza, da boueza varnod ar rest euz da amzer ha da jacha varnod ar goassa trisdiguezioù...

Tec'hit oll pell euz an den man, gant aoun e strinkfe varnoc'h eur fulen euz mallozioù Doue prest d'e skei ! (*an oll a dec'h.*)

TROMENEC'H, *e hardizeguez o goueza a ra e c'hiz en despet dezhan eur c'hammed var zu an Eskop*

A kredi a raffoc'h teuler da vad varnhon-me an eskummunuguen ?

AN ESKOP

Ia, hen ober a rin, nemed plega a raffez dirak Doue. Gra buhan da zonzj, araog ma vezo mouguet

ar goulaoz-man dindan hon treid, evit diskuez penaoz e vezo mouget ivez sklerijen da vuez ! Plega a ri ?

TROMENEC'H, *mantret*

Gedit eur pennad : roit d'in eun tam amzer d'en em anaout.

AN ESKOP

Guedal ebed ! Raktal, pe goaz-a-ze d'id !... Ne levere ger ?... — Peurachui a ran eta gant al lid a goler !

TROMENEC'H, *kounnaret*

Peurachui ne ri ket : araog ma vezo mouguet ar c'houlaoz-en-ze, ar c'hlenze-man a vougo da vouez en da c'houzouk ! Dioual ! (*Sevel a ra e glenze, hag e lez raktal da goueza gant eur griaden, en eur voustra var e skoaz deou*) Ah ! Karman trubard, da daol klenze a grog breman da zevi a da zinerza d'in va breac'h ! O mez, o dismegans (*klask a ra adarre dastum e glenze, a ne hell ket*). Ne hellan soken plega gant ar boan !

AN ESKOP

Ac'hanta, Tromenec'h, ne oa ket ken dic'halloud ma lavarec'h, ar bennoz e moa roet da glenze Karman ! Chenchet eo ar bennoz-se e bilim en da c'houli ! An eskummunuguen, ken neubeut na vezho ket dic'halloud, p'eo guir araok soken koueza varnoud a zifram da glenze euz da zaouarn.

TROMENEC'H, *nec'het*

Ia, eur burzud bennac a zo e kement-man... ! Ar gouli bet var an dachen, a red dioc'h outhan ar goad !... Espernit ac'hanon, aotrou n'Eskop.

AN ESKOP

Pinijen, pinijen, pe skoed a vi ! (*e veler Robart an Diaoul o tont.*)

EIZVED PENNAD

Ar memez tud, ouspen Robart an Diaoul

GOULC'HEN

Tad koz, Robart an Diaoul !

ROBART, o c'hoapat

Ac'hanta, Tromenec'h, setu me adarre digouezet mad evit da viret da veza paket gant an dud man ! Edoz o vont da blega d'an Eskop, var zigarrez jestou an eskummunuguen. Krog eta en da glenze ; gant hennez, te a drec'ho en despet d'an eskummunuguen.

AN ESKOP

Plega a ri, Tromenec'h pe na ri ?

ROBART

Ne ri ket, gant ar vez !

AN ESKOP

O Doue, ra vezo mouguet levenez a sklerijen e vuez e c'hiz ma voug ar sklerijen man dindan va zreid ! (*Taoler a ra d'an douar ar c'houlouen, hag en bress dindan e dreid*).

TROMENEC'H, er meaz anezhan e-hunan

Skoet oun, skoet oun ! Tizet oun, tizet oun !... (*Mont a ra er meaz ; an oll d'he heul*).

NAVED PENNAD

PAOL, *pà dec'h an oll, e chom e-hunan, ac a zastum kleuze Tromenec'h, en eur lavaret :*

Na kaer eo ar c'hlenze man ; ne m'oa kredet c'hoaz betec hen sellet euz eur c'hlenze :..... Na flour an dourn anezhan..... N'eo tam re bounner d'am

breac'h..... (*C'hoariellat a ra ganthan*)..... Doue, eme an Aotrou n'Eskop, na ro skoaz nemed d'an nep a ra da genta euz e c'halloud !..... Kouer, hervez an amzer a rank gouzout ouspen kas an arat..... Peoc'h ar vro ne vezo diazezet mad nemed var gouiziegues a galloud kouer !..... Setu komzou an Eskop !..... Doue, va zikourit d'ho c'has da vir.



EIL ARVEST

GOALINIER A PINIJEN

E SAL VRAS KASTEL TROMENECH



KENTA PENNAD

ROBART *ac eun toullad soudarded* : TANGUY,
MAJAN, EOZEN, GUEVROC, *a re all.*

TANGUY

Ac'hanta, Robart ; penaoz e za hirio gant ar
mestr ?

ROBART

Feac'h ; an Tromenec'h a zo atô e c'hiz eur
c'hloc'h var vrall, oc'h en em deuler a ziou, a gleiz,
bep eil ganthan ia a nan ! Bremaik edo adarre o
lavaret hon c'has oll divar e dro evit ober euz e
gastel ti ar beden ac ar binijen. Gellet a meuz
eur vech c'hoaz e lakaat var e du ; ac e ma breman
en arrach a enep ar venec'h, dre ma meuz adarre
roet dezhan da gredi eo dre ho ardou a zigouez
ganthan kement a zarvoudou.

EOZEN

Na peuz ket ho par da sevel e boueziou da
eun den.

ROBART

A c'hui, starteat eo ho kamaladed ganeoc'h ?

TANGUY

E c'hiz an Aotrou e maint, kals anezho var
vrall !... Gant ar spountailh milliguet euz ar
Maskl-Du, int deuet goassoc'h egued biskoaz da
gredi eo an eskumunuguen a jach varnomp dar-
voudou ker stank abaoe eur bloaz.

ROBART

Kredi en eskumunuguen !... Sorc'hennou ! Grit
dezho eta kredi en eun dra ac a gasso spount an
eskumunuguen euz ho spered. Grit dezho sonjal
er bern aour dastumet aman dek vloaz zo var
bouez ho divrec'h, e riskl koll ho buez ; a c'hoant

ho deuz e zache an tenzor ze da sevel chapeliou, da lavaret offerennou, da binvidikat ar Venec'h ? N'ho deuz ket emichans ; grit dezho c'hoaz kompren n'euz ken abek d'an darvoudou a gouez varnomp nemed ho lezireguez ; ma zigorfe pebhini e zaoulagad, e zaffe aman mad an traou e c'hiz guechall, deomp da ren meur a vlavez c'hoaz buez euruz.

Mez pe seurt trouz a glevan ?

EIL PENNAD

Ar memez re ; soudarded all : GUENOLE, GONGAR, SANE, PRIMEL, a re all o tont gant eur c'horf maro ; e tiskennont, tenval ho fen a sioul, d'ar pen izella euz an theâtr.

ROBART

Petra e tougit tu aman adarre ?

GONGART

Er guelet a rit.

ROBART, *goude sellet*

Mil malloz !... Unan all lazet adarre.

GUENOLE

Ia, siouaz ; unan adarre ; an dekvet abaoue pemzek dervez.

ROBART

A. gant ar Maskl-Du adarre.

GONGART

Ganthan eo great an taol ; ne c'hellomp en em lakât en hent evit an disterra skrab eb e gaout var hor c'hein.

ROBART

Ac a peuz adarre e velet ?

GONGART

Ia : edomp hon tri, ar paourkeaz Loïs, Primel a me, o vont gant henchou doun an aot da spia al lestr pinvidik a ioa oc'h erruout er porz ; Loïs a ioa eun ugent kammed bennak en hon raok var an hent, pa glevchomp ganthan eur griaden ac e velchomp o tont a lam-pik dreist ar c'hae eun den, klenze en e zourn, ac Maskl-Du var e fas ; arok m'hen dije gellet Loïs kregi en e glenze na ni mont de sikour, e oa diskarret d'an douar, o veunzi en e c'hoad a strinke a boulladou euz e gostez digor e c'hiz ma er guelit aze ; ac ar Maskl-Du, adarre dreist ar c'hae gant ar memez lam spountuz eb lavaret eur ger.

ROBART

Petra a lavaro adarre Tromenec'h pa c'houezo kementman ? (*ac e chom da zonzjal*).

GONGART, *o sellet euz ar gouli*

Ac ato ar memez gouli : ato ar memez taol di-druetz da ziguerri doun a ledan ar c'hostez kleiz a da zaou hanteri ar galoun... Sellit : euzus eo eun hevelep gouli : kaer a meuz beza den a vrezel, ar guel euz ar gouli-man a ra d'in skrija.

GUENOLE, *o sellet ivez*

Ia, mantruz eo : henvel ar gouli euz an hini hen devoa great Tromenec'h da Garman : ato er memez leac'h, ato ar memez trouc'h doun a ledan.

TANGUY

Lavaret a raffet soken a vez great gant ar memez klenze.

GONGART

Klenze bras Tromenec'h ; abaoue deiz an esku-munuguen den ne c'hoar pe seurt eo deuet da veza ar c'hlenze-se ; den ne c'hoar gant piou a oa bet dastumet var zal vras manac'hti an Elez.

GONGART

Bloaz eo bet eb rei euz e gelou ; mez abaoe pemzek dervez a sko varnomp goal griz ; rak hen eo, sùr oun, ar c'hlenze bras ze a zo o skei ac'h-nomp d'ar maro an eil goude eguile.

GUENOLE

Piou eo hennez da vihana a c'hoari ganthan ken ter a Tromenec'h e hunan ?

GONGART

Piou ? Evidoun me a gred start eo Karmian e-hunan a zav euz e vez evit dont da venji ac'h-nomp.

SANE

Ar pezh a zo sùr, henvel aoualc'h eo ment ar Maskl-Du euz ment Karman ; mistr a guen e c'hiz eur paotr iaouank flam ne vez ket c'hoaz great e gorf dioc'h outhan : skanv e droad, prim e vreak'h e c'hiz al luc'hed.

GONGART

N'euz ket da lavaret : Karman e hunan eo.

GUENOLE

Houman evelato n'eo ket eur vicher eo : me ne c'houlennan ket guelloc'h egued stourm ; mes gant ma vezo euz tud beo ; stourm euz an Anaoun n'eo tam ebed euz va doare.

SANE

Oll omp barnet d'ar maro.

ROBART, *drouk*

Barnet d'ar maro, azennet ma zoc'h ; barnet d'ar maro, peulioù diskiant ! Ho lezet a meuz an eil goude eguile da zisplega ho sorc'hennou evit gouzout betec pelec'h e zache ho spered diskiantet !

Elec'h en em lezel da veza sounnet oc'h izili gant ar spount, ma karche c'hui redek var lech ho Maskl-Du gant ho klenze, pell-zo e vije diskennet ganeoc'h dindan an douar d'ou lezel aman e peoc'h.

GONGART

En 'han' Doue, Robart, roit peoc'h ; ne gomzit ket ken direspel euz an Anaoun.

ROBART

Anaoun ? Pennou sot ! Ma vijec'h c'hui bet ken beo ac hennez a vije bet brao deoc'h a deomp ni oll. Arok pell aman, c'hui er guelo, me a ziframmo euz fas an den-se e vaskl-du da ziskuez deoc'h pe eur pen maro pe eur pen beo a zo kuzet dindan... Setu erru Tromenec'h : arabed eo a velfe ar c'horf maro-man ; koll a raffe adarre e ben goassoc'h egued biskoaz ; en em vodit en dro dezhan evit e guzat. (*Ac e reont.*)

PEVARE PENNAD

*Ar memez re : TROMENEC'H ouspen, ar zoudard
URFOLD ganthan etre e zaouarn*

TROMENEC'H

Setu aman adarre unan ac a glaske tec'hel euz ar c'hastel ; paket eo bet ganen diglenze o vont dre skóach gant an hent. Lavar, perac a glaskez te tec'hel ouzomp ni aman ? A n'eo ket guelloc'h d'id beza ganeomp ni o ren buez plijaduruz egued o vervel gant an naoun e ti da dad ?

URFOLD

Plijaduruz, Aotrou e kavit hor buez aman ? Abaoe eur bloaz n'euz aman nemed darvoudou a bep seurt, spount a maro. An oll savet en hon enep en dro deomp, o c'hortoz ar mare d'hon dispen ?... A ma n'hon divije bet c'hoaz da stourm nemed euz

an dud ; me ne meuz kizet jamez dirak diren eun den ; mez n'eo ket euz an dud hon deuz ni da stourm aman.

TROMENEC'H

N'eo ket euz tud ? Euz piou eta neuze ?

URFOLD

Oc'h unan a peuz lavaret, Aotrou : ho klevet a meuz an deiz all : euz Doue e hunan hon deuz da enebi abaoe deiz an eskumunuguen.

TROMENEC'H

An eskumunuguen adarre ?... Ker a gousto d'id komz d'in euz an eskumunuguen ; guelloc'h a vije bet d'in kaout eun taol klenze egued klevet ar gese o skei pounner var va c'haloun.... evit dizouna ar re-all euz ar c'hoant tec'hel ouzin ac evit deski dezho a zeuz certen traou a ne ranker ket komz anezho dirazoun-me, e vezi krouget raktal !.... Goardou !.... Goardou !.... Respount ebed.... Goardou !.... A tec'hel a vijent ivez ! Guelet a rez Robart !... Netra da ober gant ar seurt tud-man ; chom a raïmp hon daou aman da veza paket gant an nep a garo dont....

Mez c'hui, perak e chomit-tu aze da ziguerri ho kenou : kit eta buhan da velet pelec'h e chom ar goardou. (Daou anezho a za kuit ; ar re-all a en em start adarre).... Petra a guzit-tu aze ? (*Mont a ra da velet*)... Piou eo heman ?... Ac hien maro !... A c'hui eo a peuz great an taol pa e guzit ker brao ;... Respount ebed... stoui a rit ho pen... Ne vanke mui d'in nemed an dra-man : n'eo ket aoualc'h deomp kaout an oll a-enep deomp : hon-unan etrezomp a rankomp c'hoaz en em zrailla !...

GONGART

N'eo ket ganeomp eo bet lazet heman, Aotrou !... Sellit euz ar gouli man.

TROMENEC'H, *stouet o sellët*

Taol va c'hlenze adarre ?... Eun taol euz ar Maskl-Du !... O ! skrija a ra ennhoun va c'haloun !... O den maleürus ma zoun... (*mont a ra kuit*).

ROBART

Eur goal abaden eo houman evelato : setu breman ar goardou.

PEMPED PENNAD

Ar memez re, nemed Tromenec'h : Efflam ac Armel, ar goardou

ROBART

Pelec'h edoc'h c'hui, tud didalvez : Penaoz e tilezit tu dor ar c'hastel en eur mare ken trubuilluz evidomp ? A c'hoant tec'hel a trahissa a peffe c'hui ivez ?

EFFLAM

C'hoant ebed, Robart ; mez eur c'helou ken mantruz a zo deuet bremaik er c'hastel ma omp chomet e c'hiz eb gouzout dare deomp d'e selaou.

ROBART

Eur c'helou adarre ? ac eur c'helou mantruz var ar mac'had ; maro an didalvez man, kredabl, eo a rit anezhan eur c'helou mantruz ?

EFFLAM

N'eo ket Robart : goassoc'h eo : Ha pa c'houezo Tromenec'h kementman !...

ROBART

Pe seurt eta, paotred eo ar c'helou-ze ken iskiz ?

EFFLAM

Mad ; ar c'helou ze eo maro Fontanella ! Ar

markiz a zo bet kroget ennhan ; kasset eo bet da Baris ; prizouniet eo bet ; barnet eo bet, a kon-daonet da vervel etre daouarn ar bourreo ; epad daouzek heur horolach eo bet e gorf var ar rod o terri a vel d'ar Bobl.

EZOEN

A pe seurt a fell d'id a raffe kement-se d'an Aotrou aman ?

EFFLAM

Pe seurt ? N'ouzez ket eta edo Fontanella brassa mignoun an Aotrou ? Ouspen, ho doare a oa ken henvel ma ranko beza skoet Tromenec'h pa eo bet skoet Fontanella. Fontanella a oa e Kerne gant e soudarded oc'h ober ar vicher a reomp ni aman gant an aotrou Tromenec'h. Dek vloaz ho deuz gellet ho daou ren an dans d'ho c'hoant, o veza ma hen doa ar Roue aoualc'h da ober oc'h en em zifen e-hunan var e drôn a enep e adversourien ; pa eo bet treac'h breman, a boagn da lakaat ar reiz er vro : Fontanella hen deuz tizet da genta ; ne zaleo ket da zont betec Tromenec'h : mez setu aman ar mestr.

SEIZVED PENNAD

*Ar memez re, TROMENEC'H ouspen, gant ar
Baleer-Bro*

TROMENEC'H, *tenval bras e ben*

En em dennit oll dioc'h ouzin ; list ac'hanoun gant an den-man.

GONGART, *a vouez izel*

Eur goal daol, evit doare, eo bet dezhan ar c'helou.

EIZVET PENNAD

Tromenec'h ac ar Baleer-Bro, Tugdual

TROMENEC'H

Bihan eo eat va c'halon gant ar c'helou-man !... Fontanella, va mignoun Fontanella bourrevet a torret var ar rod.... Ne hellet skei eun taol pouneroc'h var va c'halon !... Skei a ra var va c'halon e c'hiz pa vez lezou va maro va hunan !... O Fontanella, va mignoun keaz, Fontanella !

Mez penaoz eo c'hoarvezet kementse ? Fontanella a veve didrabaz en e enezen, ac ar pardoun a oa bet promettet dezhan ?

TUGDUAL AR BALEER-BRO

Penaoz eo c'hoarvezet, ne c'hellan ket lavaret ; ar pezh a c'houezan n'euz ken kaoz dre Gerne, dre Leoun a dre Vro Dreger ; ne glever dre ar vro ken guerz nemed guerz maro Fontanella.

TROMENEC'H

Kan d'in eta ivez guerz maro Fontanella, ma c'houezin penaoz a vezo va hini me dizale.

TUGDUAL (o kana var don Ker-Iz)

I

Euz e brizoun Fontanella
A lavare en eur ouela,
A lavare d'e bach bihan
Monet da red da Goatelan :

II

« Pachik, pachik, va fach bihan
Kea d'am maner a Goatelan
Da lavaret d'am fried keaz
Diviska e zae dantelez.

III

» Diviska seiz a dantelez
Rak e fried a zo diez
A c'houlén roched da viska
Ac eul linser d'e lienna.

IV

A c'houlén eur roched lien
Ac eul linser vras lien guen
Ac ouспен eur plad alaouret
Vit e ben pa vo dibennet.

V

» Rak distro arok na vezi
Da gaout va fried en e zi
Va fen a vo var ar pave
O c'hoari gant ar vugale.

VI

» Dall eur guchen euz ar bleo-man
Da staga euz dor Coatelan
Ma c'houlénno an dud keiz
Truez Doue var ar markiz. »

TROMENEC'H, *en disesper*

Truez Doue ? Truez Doue ? Ac hen a hell beza truez evidomp ni, Fontanella ? na truez an dud na truez Doue ; truez n'ho deuz bet evidod ; truez n'ho devezo evidoun-meken neubeud.

Ar maro, a pebeuz maro ne meuz me ken da c'hedal... Ar maro var ar rod, dispennet d'in va c'hik a torret va eskern gant ar bourreo !... A goassa zo, an dud o c'hoarzin d'in e kreiz va foaniou !... A goassoc'h c'hoaz, goassoc'h bourrevet gant ar remorsiou a gant ar re varo egued gant ar bourreo !... O Fontanella, ac hint n'int ket deuet en dro d'id, var da dremenvan, Eneou an dud keiz e poa lazet ?... Bugaligou lazet var barlen ho mam, ac ar vam var ar marc'had : ac ar pezh a

zo goassoc'h c'hoaz, Eneou pur, Eneou divlam kollet ganen a gant va soudarded !... O pebeuz maro eo bet da hini, pebeuz maro a vo va hini me !

TUGDUAL

Aotrou : Doue a zo bras e vadelez ; grit pinijen euz ho torfedou.

TROMENEC'H (*o sevel e ben, en e zav*)

Pinijen euz va zorfedou !... Piu a gred aman komz d'in euz va dorfedou !... Ha ! er guelel a ran ; Ha maro Fontanella a ro d'ar c'hoz chass man hardizeguez da zont da c'harzal ouzin me... Diouallit, n'eo ket c'hoarvezet c'hoaz ganen tro Fontanella... Er meaz, ma ne fell ket d'id gouzout peguen pounner eo dourn a klenze Tromenec'h. (*Ar baleer kuit.*)

NAVED PENNAD

TROMENEC'H *e-hunan*

Ho ! En arrach a zan pa velan a zonzj ar reman va guelel dizale diskarret, barnet, a dispennet a vel d'an oll eb gellout en em zifen euz ho goaperez !... N'oun ket diskaret c'hoaz : a ma rankan koueza, m'hen tou, ne gouezin nemed var eur bern korfou maro skoet ganin, a var eur poullad goad distanket gant va c'hlenze !... (*Skei a ra e glenze en dro dezhan, en arrach ; en eur glemmaden.*) Siouaz d'in !... Ankounac'heat ganen va gouli !... Ankounac'heat peguen izel oun dija diskarref !... Gouli klenze Karman abaoue eur bloaz a gendalc'h, e c'hiz ar c'hrign-beo, da zevi d'in va c'hik bilimet... (*An dourn var e c'houl.*) Goassoc'h goassa em c'hrign bemdez : ne hellan soken sevel va brec'h eb ne savche kerkent eur c'houezen c'hoad da redek gant va c'hostennou !... Dinerzet va brec'h, pleget va

c'hein, kosseat va fen, a guen va bleo!... Kaer a meuz kuzet va gouli a nac'h va foan, re sklear eo, malloz an eskumunuguen eo a sko varnhoun ac en dro d'in; na deu mui netra da vad ganen!... Bilim klenze Karman, bilim an eskumunuguen a en em zil bemdez dounnoc'h dre bep fulen euz va c'horf betec va mel, betec va c'haloun!...

O Karman, Karman, na kriz eo da venjans! Me na meuz da lazet nemed eur vech, a te bemdez a bemnoz e ma da spes dirazhoun o suna va goad dre ar gouli man ac o tizec'hi va buez....

Mankout a ra d'in va buez!... diguerri a rankan ar prenestr (*diguerri a ra*) Ezennik fresk ar pardaez a deu da zistana va goad... (*Halani a ra*)... Mez petra a ran-me? E ma dirazoun ar foennok, ar foennok milliguet a meuz varnhi roet taol ar maro!... En despet d'in, pe seurt eta a ra d'in trei va daoulagad var an dachen a meuz varnhi skuillet ar goad!.... Setu adarre Karman du-hont var e varc'h!.... Setu hen o koueza, e galoun treuzet!.... Klevet a ran adarre e griaden fors!.... e zaoulagad oc'h ober ouzin eur zel ken estlammuz!.... Truez, truez, Karman, truez!...

O! pebeuz buez eo va hini!... A pe seurt a vo va maro!

Pe seurt a vo ifern ar bed-all pa eo ken iskiz ifern ar goustians....

(*Goustad ac izel*). Na vad a raffe d'in koueza d'an daoulin, goulén ar pardoun, a lemmel euz va diskoaz ar bec'h euz ar malloz!.... Plega d'an daoulin?... Dir a zo varnho, a dir var va c'haloun!.... Nan, plega na rin james!... (*Chom a ra da vantri*).

DEKVET PENNAD

Tromenec'h, an Abbad

AN ABBAD

Peoc'h Doue ra vezo ganez, va mab.

TROMENEC'H, *drouk adarre*

Piou a gred tostât ouzin eb goulén aotre?... Menec'h ac all, an oll a hardissa ouzin.

AN ABBAD

An den a deu euz a berz Doue n'hen deuz aotre ebed da gaout evit dont betec an Ene hen deuz ezom anezhan.... Me a deu da ginnik d'id adarre ar peoc'h.

TROMENEC'H o *tiskuez e glenze*

Ar peoc'h?... Gant heman me a meuz ar peoc'h euz an nep a garan...., dioc'h ouzid te soken bremaik ma ne dec'hez raktal.

AN ABBAD o *tostaat*

Va mab keaz, eaz a ve did diskar ar manac'h koz hen deuz da gelennet; kementse ne roffe ket d'id ar peoc'h; kementse ne raffe nemed kreski da enkrez; rak kaer a peuz kuzet a nac'h ouzin, var da dal me a len enkrez da galoun.... (*o lakaat e zourn var skoaz Tromenec'h*). Tav eta, va mab, gant da fougurez, a selaou mouez da vignoun koz, mouez tad da Ene keaz; me a helfe renta did adarre eurusted da vugaleach, pa edoz ken pur a ken laouen o pedi euz barlen da vam!

TROMENEC'H (*tenereat*)

Va bugaleach!... va mam!... Perak e komzez euz va mam, euz va bugaleach?... N'eo nemed trenkoc'h va foan, pa deu enhoun ar zonj euz levenez guechall!... Perak n'oun me ket maro bihanik var barlen va mam (*klevet a rer dre ar prenestr ar c'haner a-bell, o kana guerez Fontanella*)... Silaouit: adarre guerez Fontanella! (*Eur c'houplad pe zaou*)... Siouaz, n'eo ket var barlen va mam, etre daouarn ar bourreo eo e varvin me e c'hiz dezhan. (*Klask a ra serra ar prenestr*).

AN ABBAD

Nan, va mab, ne zar ket ar prenestr ; list da zont betec da galoun mouez ar c'haner (*selaou a reont ar verz... Mouez ar c'haner a glever pelloc'hik da bep kouplad ; Tromenec'h a selaou strafuillet oll*).

Doùe e-hunan a felle dezhan lakât dirak da spered skouer Fontanella evit da gentelia... Pini-jen, va mab, pinijen ; na c'hed ket an heur diveza ; pinijen an heur diveza a zo chansus ; distaga euz ar pec'hed e kreiz an nerz, n'euz ken doare da gaout ar pardoun. A n'eo ket ebken pardoun Doue e kavi er bed-all oc'h ober hirio pinijen ; pardoun ar Roue evit ar bed man e kavi ivez ; euz a berz Aotrou n' Eskop Kastel, me a bromet did pardoun ar Roue ma tistroez hirio : varc'hoaz a vézo divezad marteze.

TROMENEC'H (*trenk e vouez*).

Promessaou ? Pe seurt eo promessaou ? Fontanella ivez a oa bet great dezhan promessaou, a pa dal ho deuz e lazet var ar rod.

AN ABBAD

Fontanella a oue chomet stag e galoun euz an drouk ; Doue hen deuz permettet a vije torret e gorf evit terri liam ar pec'hed... Tor eta te, liam ar pec'hed da genta evit savetei da gorf a da Ene. Ma helfe Fontanella distrei euz ar bed-all, peguen izel ne blegfe ket evit miret euz tourmanchou ar maroñac euz poaniou krissoc'h c'hoaz ar bed-all.

TROMENEC'H

Plega !... Plega !... Pe seurt a lavarfe an dud ?

AN ABBAD

Ha ! setu dizoloet ganez ar gouli, digarrez an ourgouilh !

Pe seurt a lavaro an dud ? Fors pe seurt a livirint, ho c'homzou, bez sûr, ne vroudint ket ac'hannoud ken bilimuz ac a rint, pa da velint dinerzet, var ar rod o vourrevi.

TROMENEC'H *en disesper*

Mez ne hellan ket plega ; na pa garfen ne helfen ket ; klasket a meuz avechou soubla va daoulin : dir a zo varnho, a dir var va c'haloun ; na va daoulin na va c'haloun ne hellont plega.

AN ABBAD (*Krenv e vouez, o tiskuez e grusifi*)

O va mab, ne hellez ket plega ! Sell heman, sell da Zoue ! Heman hen deuz pleget, pleget e galoun betec en em lezel gant fallagriez ar Barner a goaperez an dud ; pleget hen deuz e zaoulin, pleget kement a ioa en e gorf evit en em asten var ar Groaz... O va Doue, roñt d'in oc'h hunan komzou da vont betec e galoun... Ar guel euz heman a deunzo an dir var da galoun a da zaoulin... Eur zel var da Zoue torret e gorf goassoc'h egued n'eo bet korf da vignoun, Fontanella, goassoc'h egued na vezo jamez da hini ; torret e gorf evit da dorfedoute, evit ma vezi te espernet... Ne zistro ket evelse da zaoulagad ; Heman eo da Zoue, da Zalver, Jezuz o tiguerr d'id e zivreac'h ac e galoun. (*Ar manac'h eun dourn en dro da gerc'hen Tromenec'h, en dourn all ar grusifi, a stou e hunan goustad d'an daoulin ; Tromenec'h a stou ganthan, ec'hiz en despet dezhan ; ober a ra erfin eur zel var ar groaz, ac a gouez d'an daoulin o pokat dezhi, ac o lavaret*) :

TROMENEC'H

Truez, va Doue, va Jesus !

AN ABBAD *a zav*

Setu hen etre divreac'h e Zoue !... Mil bennoz deoc'h, o Doue ar bec'herien, Doue a drugarez ac a bardoun.... Lavar d'in breman va mab a diez eo

plega da Zoue. Lavar d'in ma n'eo ket mil guech
dousoc'h ar binijen var an daoulin egued an our-
gouilh kriz a c'hoero.

TROMENEC'H o lenva

Bennoz deoc'h, ô va Doue ; a pardoun d'in, ô va
Mestr.

UNNEKVET PENNAD

Ar memez re ; ROBERT ouspen

ROBERT o tiroll da c'hoarzin

Eun diaoul a zen oud'te, manac'h, evit beza
deuet a ben ker brao da baka ar pesk man...

Ne c'houien ket, aotrou, edoc'h c'hui ken devot ;
koveseat mad a peuz da vihana ?

TROMENEC'H, o sevel

Ia, Robert ; koveseat mad a meuz : a ne meuz
izom ebed da beurachui ganez va confession ; a pa
na vije doun a stard ar binijen em c'haloun, te a
vije marteze koustet ker d'id goapaat ac'hanoun ;
mez goapat a hellez kement a ma kiri ; evelato,
koll a rez da amzer ; rak evit mad a meuz troet
kein da hent ar pec'hed.

ROBERT

Ah, troet a peuz kein da hent ar pec'hed ; mez
Aotrou, ankounac'hât a rit eun dra : daou ugent
soudard a zo d'oc'h heul, ken striz unanet ho buez
gant oc'h hini ma ne hell affer ebed sellet ouzoc'h
eb na selfe er memez amzer euz ho soudarded ; ac
an affer man ispisial a zel ouzomp oll : rak petra a
deuffemp ni da veza matilezit ac'hanomp. E maoc'h,
eme c'hui, o klask an hent mad ac ehun ; ac a gav
deoc'h eo ehun a mad an hent a ra deoc'h trei kein
da dud ac ho deuz dilezet peb tra evidoc'h ? Ac a
fell deoc'h ho dilezel eb goulén soken ho ali ? Re
vad a anavezan ho lealded evit kredi e trahissoc'h

anezho ken didruez ; gant oc'h aotre e c'halvin
aman ar re anezho a zo dre ahont tost, ma hellint
lavaret ho ger en affer man. (*Robert kuit*).

DAOUZEKVET PENNAD

TROMENEC'H, AN ABBAD

TROMENEC'H

Ho ! chadennou pounner ! chadennou kalet ! me
a gave d'in e moa torret ar goassa chadennou,
aman em c'haloun ; a setu me liammet goassoc'h
egued biskoaz.

AN ABBAD

Liammou an techou fall a zo diez da derri ;
diessoc'h c'hoaz liammou ar fals mignouniachou !
evelato, ne falgouloun ket ; Doue, pa hen deuz roet
d'id nerz da drec'hi er stourm kenta, da rento
trec'h c'hoaz er stourmou all !

TROMENEC'H

Sikourit ac'hanoun ivez, va Zad ; aoun a meuz
oc'h en em gaout dirak kamaladed va buez diroll ;
aoun a meuz, ken dinerz m'a z'oun, da veza adarre
touellet gantho !

Guelet a ran breman pe seurt drouk a ra eun den
o skoulma mignouniach gant eun den diroll ! En
em goll a ra e-hunan da genta ; koll a ra da c'houde
ar re-all ; ac an eil o chacha eguile, e redont,
e risklont en eur c'hoarzin e c'hiz tud diskiant, var
hent ar fank ac an Ifern ! Va Doue evit sevel, evit
pignat adarre gantho goude beza risklet ken izel a
ken doun, roët d'in ho nerz !...

Mez hirio ne c'helfen ket stourm ; varc'hoaz e
vezin kreffoc'h .. (*D'ar soudarded, e kichen*) ;
Paotred, livirit da Robert n'en em gavin ganthan
a ganeoc'h nemed varc'hoaz.

FIN AN EIL ARVEST

TREDE ARVEST

CHAPEL AN ABSOLVEN



KENTA PENNAD

ROBART *ac e genseurted* : TANGUY, MAJAN, EOZEN,
GUEVROC, *a re all*

ROBART

Mignoured, er gouzout a rit ; bremaïk a deuo
Tromenec'h, gant e neuziou santik, da ober deomp
eun tam sarmoun, da alia ac'hanomp da vont sioul,
e c'hiz bugaligou fur, er meaz euz an ti-man ; evit
ober plijadur d'an Aotrou, ni a ranko en em deuler
etoëuz enebourien a bep seurt a zo pell zo o klask
tro d'hon dispen ; ac epad ma vezimp ni dindan
skilf ar bleiz, pe o vervel gant an naoun, hen
aman gant e vignoured nevez ar venac'h, a ranno
e densoriou da sevel eur chapel, a da ober cher vad.

Pe seurt respount a fell deoc'h a vez great d'ar
zarmoun e maomp bremaïk o vont da glevet !

TANGUY

Aman eo brao, beza paotred : bara guen ato da
zibri : peurliessa eur banne mad a vin d'e lakat da
zisken ; eun tam lib e bao eur vech an amzer : tra,
tra, tra, ne ket me a vo kasset da redek an hen-
chou a da zilezel eur seurt tachen zruz !

MAJAN

Pa vezer bet e c'hiz d'eomp-ni, hen Tanguy, o
veva bep eil divar an aluzen ac al laeroni, an
archer var hor seuliou dalc'hmada, a gaver re vreo
kaout eur maner e c'hiz heman da repu.

ROBART

Mad ; ac ar re-all a zo aman, dioc'h ma velan,
ho deuz an ear da lavaret e c'hiz deoc'h-c'hui.

AN OLL

Ia ! Ia... aman eo brao beza... guelloc'h beza en
ti egued beza er meaz.

ROBART

Pet a zo eta ac'hanoc'h prest da zerc'hel pen d'an Tromenec'h, pa glasko ho kas da bourmen ?

EOZEN

Setu ni aman eiz.

GUEVROC

Ac eiz all da neubeuta a vez kavet c'hoaz e touez ar gamaladed ?

ROBART

Tost d'eun hanter euz soudarded ar c'hastel ; aoualc'h eo, mar kirit derc'hel start, evit miret euz an Aotrou d'hon lakat er meaz. Edro e c'hiz ma eo, ma savit krenv ac huel ho mouez, ne gredo ket soken kerderec'hel gant ar zonj d'en em zizober ac'hanomp.

TANGUY

Dreist oll, o veza m'hen deuz izom ac'hanomp : ne hell ket fiziout en azennet all prest, kerkent pa gavint tro, da dec'hel abalamour d'ar Maskl-Du ; euz eur zoudard bennac hen devezo ato ezom.

ROBART

Mad : prest oc'h eta da senti ouzin e kement ma c'hourc'hemennin, fors peguen kalet a vez an urz a rin d'eoc'h ?

EOZEN

Oll aman hor beuz fizians ennoc'h : oll e sentimp d'ho ker.

ROBART

Mad ; kit neuze buhan da lavaret d'ar re-all, en em gaout aman ; te, Tanguy, kea da lavaret d'ar mestr a vo bremaik dastumet an oll evit e glevet.

EIL PENNAD

ROBART (*e hunan, laouen*)

Dalc'h-ta, Robart ! Dizale e vezi mestr er c'hastel-man ; a ma deu da c'houde paotred ar Roue da glask lakât ho c'hraban varnhoun, va riboul a zo prest da jacha ganen va relegou ac oll aour an ti-man, evit mont da sevel en eur vro all eur c'hastel bravoc'h egued heman... Guelomp ma tigor brao ac eaz an toul strap. (*Diguerrri a ra an trap, ac a zel ebars*) ; euz ac'haleu d'an aot a zo eun hent dre zindan an douar : ac e pen an hent du-hont, eur vag ato prest d'am diguemer a d'am c'has elec'h ma plijo ganen mont.

Mez setu an Aotrou o tont, gant e soudarded ; pe kentoc'h gant va re me : rak muioc'h int d'in egued dezhan.

TREDE PENNAD

Tromenec'h ; soudarded a-leiz, a bep tu

TROMENEC'H, *azezet e kreiz*

Va mignouned, eun dra a bouez a meuz da ziskleria deoc'h ; guelet a rit oc'h-unan peguen riskluz a deu hor buez da veza aman ; abaoue eur bloaz, pet a pet euz ho kamaladed lazet, an darn vuia euz eun doare iskiz ; eaz eo anaout e ma dourn Doue a enep deomp. A dourn ar Roue ouspen a c'hourdrouz koueza varnomp ivez.

Ac hen ne gav ket deoc'h a ve fur deomp en em zispartia, evit klask en tu-bennak eur chans velloc'h ? Komzit eb aoun, a lavarit d'in pebhini oc'h avis.

TANGUY

Pa c'houlennit hon avis e lavarin e choman sebezet neat ouz ho klevet : deac'h diveza e kassec'h d'ar groug ar re a dec'he diouzoc'h, ac hirio e rit kaoz d'hon c'hass oll divar ho tro ?

TROMENEC'H

Ia, guir eo ; souezus eo evidoc'h ar pezh a lavar : rak ne c'houezit ket abaoe pe geit amzer a oa mouez Doue euz va gourdrouz, ac e zourn var va fen evit ober d'in plega : ken a oa dec'h, ne oa ket tizet d'in klevet e vouez a gullet e zourn ; ac a meuz stourmet pel ac hir ; mez deac'h eo digoret va daoulagad ; a ne hellan en em resolvi da stourm pelloc'h euz ar Mestr.

MAJAN

Evidoun-me, souesussa a gavan eo e rankomp en em zispartia var zigarre ez euz kals enebourien a enep deomp. Roesoun muioc'h na petra ta da jom aman unanet, er c'hastel krenv man evit en em zifen : n'eo ket pa vez ar bleiz e toul an nor ac a hed an henchou eo d'an dud mont pebhini euz e gostez.

EOZEN

Sklear eo kementse : ma e ma tud ar Roue o klask ac'hanomp, araok ma vezimp bet pevar heur var n'uguent er meaz a vezo ho dourn varnomp.

TROMENEC'H

Euz a berz tud ar Roue na peuz aoun abed da gaout ; ar pardoun a zo promettet deomp gant ma vezo savet aman tost eur chapel da lavaret d'an oll e tiansavomp hor buez tremenet.

ROBART

Ne meuz evidoun me izom ebed euz pardoun nac absolven ; an absolven na dalo d'in me tam ebed guelloch egued ar groug : pe seurt a raïmp ni gant hor buez pa vezo lammet ganeomp hor mi-cher ; penaoz e c'houezimp ni hor bara ? C'hui a gav deoc'h, Aotrou, e hellimp, goude keit all amzer tremenet er vicher man, en em lakât d'eur vicher all ?

TROMENEC'H

Sonjet a meuz kementse va hunan ; ac a meuz kasset deoc'h d'ar pardaez an Aotrou N'Abbad da Gastel, da gaout an Aotrou n' Eskop, ma obteno heman evidoc'h beza digemeret oll e servich ar Roue ; ar Roue hen deuz izom paotred start en e arme ; an Aotrou N'Abbad, evit beza kentoc'h a ze distro d'hor c'haout a valeo noz deiz ; dizale a vo aman ; a kerkent ma vezo deuet gant e respount, e zaimp assamblez, arok en em zispartia, da lakat en douar mean kenta chapel an Absolven.

Plijout a ra deoc'h va mennoziou ?

PRIMEL

Evidoun me ne hellan aualc'h ho trugarekat ; goude ar pezh a zo tremenet, a vije bet goal boaniur d'in chom da veva er c'hastel man ; euz euz c'hostez all mont da vale dre an henchou, e riskl mervel gant an naoun, a vije bet kaled ivez ; kavet a peuz an dalc'h, Aotrou, d'hon kountanti.

TROMENEC'H

Mad eo : kit eta neuze pebhini d'e bost breman ; pa deuio an Aotrou N'Abbad, a vo kasset kelou deoc'h da zont aman adarre (*kuit gant an darn-
vuia euz e soudarded*).

PEVARE PENNAD

*Robart ac e genseurtes : Tanguy, Majan, Eozen,
Guevroc... ac ar re all*

ROBART

Mil malloz ! Trec'het oun bet gant an Tromenec'h : ne m'oa ket sonjet e servich ar Roue, ac oun chomet ber da respount d'an Tromenec'h !... Ia, an trec'h a zo ganthan : ma vez digumeret e soudarded e servich ar Roue, ac hen lakeat marteze da gabiten varnho, deomp-ni eo a vo tec'het ac'halen.

TANGUY

Perak, Robart, ne tec'hfemp ket ! me na zisplij ket kementse d'in beza soudard ar Roue : eur vicher v Rao eo goude tout.

ROBART

Setu eman o sodi e c'hiz ar re all. Eur vicher v Rao, beza soudard ? Va faot, me a c'hoar petra eo : beza stag e c'hiz ar c'hi, ber a start ; a ne vezoc'h distag euz ho chaden nemet evit beza staget euz ar groug evit an disterra digarez ; c'hui dreist-oll, pa vezo gouezet pe seurt micher a po bet, a vo lagad ar vistri o para ato varnoc'h, prest d'ho lakat da bae ho troiou koz ; bezit soudardet kement a ma karoc'h ; me a zo guel ganen fors petra kentoc'h egued beza soudard.

MAJAN

Mez pe seurt a raimp-ni ken ?

ROBART

Sellit !... Dont a ra d'in eur zonj !... me c'houie mad n'hen dije ket an diaoul, va zad, va lezet ber en affer-man !... Ia, kavet eo ganen, mar dec'h c'hui goazed.

TANGUY

Lavar ta neuze.

ROBART

Sonj a peuz euz ar promessa a peuz great da senti ouzin e kement tra ?

OLL

Ia, ia, sonj hon deuz.

ROBART

Mad.... Arabed eo a deuffe an Abbad betec aman da lavaret d'ar zoudarded int digemeret e servich ar Roue ; c'hui a zo o vont, pevar ac'hanoc'h, a

buhan, d'e ziarben, a d'e laza en hent : list e kichen ar c'horf maro eur merk bennak da anaout eo gant tud Tromenec'h a vezo bet great an taol ; en doare ze, aben eun daou pe tri dervez aman, elec'h an absolven a deuio adarre var gorf an Tromenec'h eun eskumunuguen all d'e lakat en arrach a enep an Eskop ac ar venec'h ; en doare ze ivez n'euz riskl ebéd a vez diguemeret hor c'hamaladed e arme ar Roue ; ac e chommimp oll aman gant ar vicher goz !.... Buhan eta en hent ; rak an Abbad ne dle ket beza pell : Eozen, gant tri euz ar reman, kemerit ar skanva kezek euz ar marchosi, a didrouz d'al labour. (*Ar pevar kuit*).

PEMPED PENNAD

ROBART, *ac ar zoudarded all*

Ni aman breman n'eo ket labour a vanko deomp ; marteze soken eo aman a vezo ar goassa abaden ; rak red eo sonjal petra a vije da ober ma deuffe ar reman da vankout var ho zaol a ma deuffe an Abbad da lavaret eo digemeret soudarded Tromenec'h e arme ar Roue.

TANGUY

Feiz : neuze n'hor bezo nemed lavaret kenavo d'ar c'hastel man, d'ar pezuigou aour, a d'an oll blijadur hor beuz bet enhan.

ROBART

Non pas c'hoaz, mar doc'h c'hui tud a ben.

MAJAN

Pe seurt sonj eta adarre a deuio d'id euz a berz Paolik ?

ROBART

Setu aman anezhi : daou euz hor mignouned e lakin da siousal an nor gant urz d'e serri euz an

Abbad mar deu ; epad an amzer-ze ni a en em gavo ken etrezomp er zal man ; e c'halvimp enho Tromenec'h var zigarrez ober digemer d'an Abbad ; (*o poueza var e gomzou*) ac aman, ni el lazo.

GUEVROC, *souezet*

Laza piou, laza Tromenec'h ?

MAJAN

Evelato.

ROBART, *o poueza muioc'h mui*

Selaouit mad ac'hanon : re bell ez omp eat evit gellout argila : ma ne lazomp Tromenec'h, pa c'houezo hon deuz klasket laza an Abbad, petra a vo great deomp ?

GUEVROC

Skler eo : hon c'has d'ar groug.

ROBART

Mad ; emichans e kavit guelloc'h laza egued beza lazet.

GUEVROC

Mad, kaer a zo ; startik a gavan laza Tromenec'h.

ROBART

A goassoc'h eo goude tout laza heman egued laza kant a kant all hon deuz kavet a dreuz var hon hent ?

GUEVROC

Heman, goude tout, eo hor c'habiten ; touet hon deuz e zifen a senti dioc'h outan.

ROBART

Ac hen?... n'euz ket touet chom en hor penn ? Hen a laka traitour ac a gas d'ar groug an nep a dro kein dezhan ; ac hen n'eo ket daou ugent guech

traitour, pa teu da drei kein d'e zaou ugent soudard a oa en em fiziet outan ?

GUEVROC

Guir eo.

ROBART

A neuze, eur vech c'hoaz, ne reomp nemet difen hor buez ; pe mervel pe laza, setu hor planeden... Prest oc'h pe n'oc'h ket da ober an taol-man, an diveza evit kaout da c'houde ar peoc'h da vad ?

AN OLL

Pa eo red, ni a skoo.

ROBART

Mad, tec'hit breman, a peoc'h var gementman ; setu an Aotrou o tont.

C'HUEC'HVET PENNAD

Tromenec'h a Robart

TROMENEC'H *nec'het*

Dale a ra an Abbad ; na mal a zo ganen, Robart, kaout ar respount, evit gellout kas d'an douar, gant mean fount ar chapel, ar bec'h euz va fec'hejou, a betec ar zonz euz va buez tremenet.

ROBART

Mantret e chomomp oll e peffe ker bras mal en em lakat en eun hevelep dismegans, plega ken izel d'ar venec'h, a sevel ar chapel a embanno gant e c'hleier, d'an oll tro var dro, eo bet trec'h ar venec'h d'an aotrou Tremenec'h.

TROMENEC'H

Ah ! Robart, achu mad eo gant va ourgouilh ; Doue en deuz great ar burzud da blega va fen

ahéurtet ; ac abaoue, pebeuz levenez em c'haloun ; peb tra nevez a bourchasser evit lid an absolven a zidan gouli va c'horf a va Ene....

Mez nac hir a gavan me an amzer.... Pelec'h e chom eta an Abbad ?... Aoun a meuz a vez c'hoarvezet ganthan eun drouk bennak ; mont a ran da veg tour ar c'hastel da velet a dont a ra gant hent Lannilis. (*Kuit*).

SEIZVET PENNAD

ROBART, *e hunan*

Ia, ia, pign d'an tour, pign betec ar bek, pign huelloc'h, mar karez da velet a dont a ra da gannad ; da gannad, aben breman a zo gant e gefridi en eur foz bennak ; ne deuio ket d'id c'hoaz fennoz an absolven ; ne vezo ket fountet c'hoaz da chapel fennoz ; na fennoz na biscoaz pe n'eo ket Robart an Diaoul va hano !

EIZVET PENNAD

Robart ac Eozen, *strafuillet*

Pe seurt kelou, Eozen ?.... Gortoz da genta ma c'halvin hor mignouned a zo aman e kichen o c'hortoz....

NAVET PENNAD

EOZEN, *e hunan*

Ah na pebeuz abaden !.... Na pebeuz abaden !....

ROBART *o tont gant ar re-all*
Great eo e affer d'an Abbad ?

EOZEN

Ia, brao ; affer hor c'hamaladed all eo a zo great

da vihana ; a me eo bet dare d'in a vije great va hini ivez.

ROBART

Petra ! A manket a vijec'h var an taol ?... Ac an tri all, e pelec'h e mañt ?

EOZEN

Lazet ho zri.

AN OLL

Ho !... Evelato !...

ROBART

Lavar deomp eta buhan da dro.

EOZEN

Kerkent er meaz euz ar c'hastel gant hor c'hezek en em lakchomp d'an daou lamp var hent Lannilis ; me a oa araok da velet peur a erruche an Abbad ; ar re all a oa eun daou c'hant kammet bennac varlerc'h ; ne oa ket savet ganen krec'hen Tregolle pa velis an abbad o tont var e droad, daou zen o terc'hel dezhan compagnez : a me var va c'hiz da rei kelou d'an tri all, a da zont adarre var zu an Abbad ; en em guzat a riz en eur streat evit e lezel da vont abiou, a chom da stanka dezhan an hent e ken kas e teuche var e giz. An tri all a oa kuzet en eur streat all ; klevet a riz, pa zigouezas gantho an Abbad, eur griaden fors pe ziou, ac e tiredis neuze, o kredi e oa great gant an Abbad ; mez petra a veliz o tigouezout var ar leac'h ? Va zri gamalad, astennet var an douar, beunzet en ho c'hoad, digor ho c'hostez gant ar memez gouli hon deuz gueleit dija ken aliez.

TANGUY

Adarre ar Maskl-Du, m'euz stouet !

EOZEN

Na petra 'ta, a pa deuiz d'am zro, gant oll her va marc'h da zaill var an Abbad, e veliz ar Maskl

dirazoun, e glenze varzu ennhoun, prest d'am skei ;
pa ne oue va marc'h hen deuz great a gostez eul
lam spountuz, ne vijen ket bet aman d'ar mare-
man.

ROBART

Aoualc'h !... ac an Abbad ?

EOZEN

An Abbad abars dek munut a vo er c'hastel.

ROBART

Paotred : arabed koll amzer : daou ac'hanoc'h,
Tanguy ac unan all, raktal d'an nor dal, da viret
euz an Abbad da antreal ; Majan, kea da lavaret
d'an Aotrou ez euz kelou aman er zal ; ne c'hoar
ket pe seurt kelou eo : Arok e skei, lest ac'hanoun
da lavaret dezhan eun neubeud geriou : eur gaou
da vantri dezhan e galon ma varvo o kredi eo bet
trahisset gant e vignouned ar venec'h ac an Eskop :
pa vezo deuet ar mare, me a zaillo varnhan ; ma
vez red, c'hui a roio skoazel ; e glevet a ran o tont ;
kemerit kaloun, a skoit didruez an traitour.

NAVET PENNAD

Ar memez re : Tromenec'h ouspen

TROMENEC'H

Kelou a zo, Robart ?

ROBART, *oc'h ober eur pen tenva*

Ia, siouaz, Aotrou ; kelou a zo ; setu aman Eozen
o tont euz a ziarben an Abbad.

TROMENEC'H

Pe seurt kelou eta a deu gant an Abbad ?

ROBART

Kelou c'houero, Aotrou : ken kriz eo ar respount
a zigas ma ne gred ket dont e hunan betec en-
nomp ; eat eo var ehun da Vanac'hti an Elez.

TROMENEC'H, *da Eozen*

Mez komz eta, Eozen ; pe seurt respount a ro
deomp an Aotrou n'Eskop.

ROBART

Absolven deoc'h c'hui ; deomp oll ar rod ac ar
maro.

TROMENEC'H

Va Doue ! A possubl a vez !... Eozen, perak ne
gomzez ket ; d'id de eo da gaozeal.

ROBART, *dichek*

Va c'homzou emichans a dall komzou heman.

TROMENEC'H

Robart ! me eo ar mestr aman... Eozen, en hano
va galloud, lavar d'in pe seurt eo respount an
Aotrou n'Eskop.

ROBART, *o sevel ter e vouez*

En hano da c'halloud ? Ganez a oa dec'h ar gal-
lout var ar reman, ganen me e ma hirio ; c'hui a
oa mestr dec'h ; me hirio eo a zo mestr.

TROMENEC'H

Petra sinifi kement-man ?

ROBART

Kementman a sinifi eo skuiz an dud keiz man euz
da velet ken didruez en ho c'hever ; hon guerzet a
peuz evit kaout da absolven a da vuez, traitour,
daou ugent guech traitour ma z'oud.

TROMENEC'H

Doueti a reen pellzo edoz te o stigma d'in eul laz bennac ; pellzo e klaskez beza mestr aman em leac'h ; mez emichans n'eo ket dall aoualc'h ar reman evit en em lakât dindan galloud eun den e c'hiz did de ? (*d'ar re all*) Evit diskuez dezhan ez oun ato ho mestr, krogit kerkent en divergont d'e liamma da c'hortoz e varnedigez !... (*den na vouj*).

ROBART, *o c'hoarzin c'houero*

Guelet a rez, Tromenec'h, piou ac'hanomp hon daou eo ar mestr ?... Ne meuz aoun ebed euz da varnediguez ; me ac ar reman eo hon deuz da varnet, da varnet d'ar maro.

TROMENEC'H, *goapaüs ivez*

Er guelet a ran : touellet ganez an dibab euz va zoudarded, ar re a meuz dastumet noaz dre an henchou pe distaget euz ar groug evit rei dezho bara a lojeiz ; mez a drugare Doue, re-all a zo amañ a n'int ket kouezet ken izel ac ar reman... Dilezit raktal ho klenzeær, pe me a za d'ho gervel aman gant eun taol trompilh !

ROBART

Trompilhat a hellez kement ha ma kari ? Moraillet an oll doriou, stanket an oll henchou evit dont betek aman ; aman etre bek hor c'hlenzeier a da galon ne zavo den ; aman e varvi !... Ac e chomin gant ar reman, va mignoured, mestr var da gastel a var da denzoriou !... Nac a veach a peuz te va disprijet abalamour n'edoun ket evelod euz a lignez huel ; bremaik ne vezi mui euz lignez ebed : a me a chomo en da gastel aman da veza an Aotrou a Dromenec'h en da leac'h.

TROMENEC'H

Va Doue, an dismegans man a meuz miritet, a

goassoc'h c'hoaz... Va lazit eta (*kroacha a ra e zivrec'h !*)

ROBART

C'hoaz a peuz da glevet... goulén a rez mervel ; mez eat eo euz da spered sonj an eskumunuguen !... Mervel a ri, a mervel en eskumunuguen !... Ha !... evit kaout da absolver a peuz hon guerzet !... Mad, an absolver na deuo ket betek ennoud ; ar maro a deuo arok : a da eskern didalvez e poa c'hoant kaout ar venec'h da skuill varnho dour binniguet, da eskern didalvez a vezo stlapet e c'hiz re eur c'hi er foz e poa lakeat da gleuza evit sevel da chapel.

TROMENEC'H, *hen deuz savet e ben a kroget en e glenze*

Ha ! Robart !... re a peuz lavaret !... Kuitaat ar vuez ne ree poan ebed d'in : mez sonj a peuz digasset d'in euz va eskumunuguen !... O va Doue, mervel gant ho malloz, gant malloz oc'h Ilis santel !... Oh ! ne hermetoc'h ket kementse ! Nan, ne hermetoc'h ket : santout a ran va nerz koz o renevezi ; da gomzou, Robart, a zo eat dreizhouñ e c'hiz guechall komzou an eskumunuguen, n'eo ket avad evit va dinerza ; savet a zo gantho dreizhouñ eur frouden a lak va goad da dridal !... (*Gant eur vouez krenv*) Robart, n'oun ket maro c'hoaz... (*e glenze savet huel*) deuit eta : ho kortoz a ran.

ROBART

Arok, paotred ; saillomp varnhan ; ne selaouit ket fouguerez ; hor c'hleuze dre e gorf e c'hiz ma reaz da Garman !

TROMENEC'H

Ne glask mui va spounta gant an hano ze !... Karman, Karman, merzer santel, d'am sikour !... Arok eta, evit Doue a Karman ! (*Klevet a rer didan an douar*) Evit Doue a Karman (*an oll a chom sabezet ; an toul strap a zigor, ac a veler o tilammet var an theatr*) ar Maskl-Du.

DEKVET PENNAD

Ar memez re :

AR MASKL-DU ! *d'ar zoudarded*

Rentit ho klenzier aman raktal e harz treid ho mestr, an Aotrou Tromenec'h !... Pe diouallit euz va hini-me !...

ROBART

Ah ! Te eo ar Maskl-Du ?... Me oa pell zo. o c'houl-en en em gaout ganez-te ! (*dont a ra dezhan*).

AR MASKL-DU, *astennet e glenze*

Robart ne da lazin ket : da dizout a rin avad ken doun ma tinerzin da vrec'h a ma chomi ganeomp da veza ereat e c'hiz eul leue evit beza lakeat etre daouarn ar bourreo. (*Eul lam araok*).

ROBART, *o koueza*

Trubard, ma zont !... Paotred, saillit varnhan !

AR MASKL-DU

Paotred, eur vech c'hoaz, ho klenzier aman raktal !...

EOZEN, *da Dromenec'h*

Aotrou, ni a en em lak etre ho taouarn ; ar maro hon deuz meritet ! (*lakât a ra e glenze e harz treid Tromenec'h ; ar re all a ra kement-all*).

AR MASKL-DU

Breman, Aotrou, gant oc'h aotre, me a ielo da glask aman an Aotrou n'Abbad, a zo dirak an nor eb gellout kaout digor !

TROMENEC'H

Kit, va mignoun !

UNNEKVET PENNAD

Ar memez re, nemet ar Maskl-Du

TROMENEC'H

Piou da vihana eo an den estlammuz-man ?... Kômzit, paotred ; ac anavezet a vez gant unan bennac ac'hanoc'h c'hui ?

EOZEN

Na me nac hini ebed ac'hanomp ne hellomp e anaout.

GUEVROC

N'hen anavezan ket ken neuveud ; evelato, se-blantout a ra d'in a meuz klevet c'hoaz ar vouez se en tu bennak.

TROMENEC'H

Mantret e choman. Ne oa nemet Robart a me oc'h anaout an hent man a zigor aman dirazomp ; penaoz hen deuz heman e anavezet ?... Penaoz eo en em gavet aman er poent ac en heur, e c'hiz Eal Doue, evit savetei d'in va c'horf a va Ene ?

DAOUZEKVED PENNAD

Ar memez re ; ouspen ar Maskl-Du, an Aotrou n'Abbat, Ronan, Herve, Goulc'hen a tud all.

AN AOTROU N'ABBAT

Aotrou, en despet da ijinou an Ifern, setu me distro, a ganen kelou mad ; diguemer a zo evit ar re-man oll e arme ar Roue... Pa ne oue evelato an den kalonek (*o tiskuez ar Maskl-Du*) man, ne vije deuet fennoz betec aman na kannad na kelou ; heman hen deuz va zenend euz a dre daouarn tor-fetourien ho deuz klasket va laza.

TROMENEC'H

Bennoz da Zoue ! Bennoz d'an oll ! Bennoz d'an Aotrou n'Eskop, bennoz d'eoc'h, Aotrou n'Abbad ; (*d'ar Maskl-Du*), a bennoz dreist-oll deoc'h c'hui, den burzuduz a peuz, goude Doue hon teninet a zrouk...

Te a zo, kredabl, unan euz duchenteled kalonek ar vro man dibabet gant Doue evit beza silvidiguez ar vro ; breman pa eo ganez achu ar gefridi roet d'id gant Doue, lavar deomp eta piou oud' te ; ten da vaskl ma velimp oll da visach.

AR MASKL-DU

Me, aotrou, n'oun ket euz goad an duchentiled ; me zo mab da Gouer ; me eo Paol, mab unan euz merourien ho tadou koz ! (*o tenna o vaskl*).

Setu aman ho kleuze e moa dastumet da zeiz an eskumunuguen e sal vras ar venec'h ; an aotrou n'Eskop, an deiz ze, gant eur ger, a reaz ac'hanoun e c'hiz eun all em flas ; gant sikour Doue a meuz desket c'hoari ar c'hleuze, a kas da ben ar men-noziou lakeat em c'haloun gant komz an aotrou N'Eskop.

GOULC'HEN

O Paol, o va breur ! (*en em deuler a ra d'e vriata*).

HERVE

O va mab !

RONAN

Va mabiz bihan ! benniguet ra viot ! (*ac e chom an daou vreur, e kreiz, an eil e kichen eguile ; an Tad koz ac an Tad a bep kostez*.)

TROMENEC'H

Meuleudi da Zoue hen deuz digasset betec ennomp ar zilvidiguez dre henchou ken burzudaz ! Breman, e dra da bephini. C'hui, soudarded fidel,

a zalek hirio, c'hui a vezo soudarded ar Roue !... (*da vignouned Robart*) C'hui avad a peuz diskuezet kaloun ken fallakr a traitour, c'hui a rankche beza kasset d'ar maro. Evelato, ar pardoun a po ivez goude eur pennad pinijen da ober assamblez ganen... Evit Robart, pen caoz euz an oll dorfedou a darvoudou kouezet var ar vro man, Robart a vezo lakeat etre daouarn ar varnerien a lavaro petra da ober dezhan.

A me, petra a rin me va hunan goude ken aliez a dorfed ac a skouer fall ; ar pardoun a c'houlennan ganeoc'h c'hui, tud dister bet flatret siouaz dindan va zreid kriz ! Te, den iaouank, sav da vouez leal en hano ar Bobl keaz a meuz ken goalgasset, a lavar d'in ma oun pardounet gantho euz an drouk a meuz great dezho.

AR MASKL-DU

Tud keiz ar Bobl, aotrou, pa eo roet dezho breman ar peoc'h evit gounit ho bara a pedi Doue, bihan a bras, koz a iaouank, a bardoun deoc'h dre va mouez, euz a greiz kaloun !

TROMENEC'H

Ra tigo ro neuze raktal ar procession evit mont assamblez gant ar Bobl a zo destumet dre aze, var al leac'h a vezo savet chapel an Absolven ; va-unan, etre va daouarn e touguin ar mean fount ; mez ne hellan ket hen ober gant an dillad brezel man gantho liou ar goad a c'houez ar muntr ! Ho diviska a ran evit guiska dillad ar binijen : te da genta, klenze kriz bet saotret gant goad divlam an dud keiz ; te tok houarn, spountailh didruez d'ar vugale ha d'ar mammou ; te stern houarn a ioa var va c'haloun da viret euz an druez da vont betec ennh...

Ac erfin, aman a zilezan ivez va c'haloun, ar galoun leun a grizder, a ourgouilh, ac a bec'hed,

evit kemer eur galoun nevezet er binijen ac er
garantez.

AN AOTROU N'ABBAT

D'an daoulin eta, va mab ; a ra vezi absolvet ; en
hano an Tad, ar Mab ac ar Spered Santel !

FIN

